

ARVOR

Koumanant-bloaz : 50 lur —
SKRIVEREZH HA MEREREZH
G. BERTHOU, 72, Str. Oberthür,
Roazhon (K.R.P. 492-98, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIK KET kas
C'HWEC'H REALAD timbroù pep
gwech ma fell deoc'h kemmfa
ho c'hemlec'h.

Goulennit an
DEIZIADUR 1944
gant eñvor
Yann-Vari PERROT

Priz : 10 lur

STRAED KALLOC'H, STRAED JAKEZ-RIOU...

Ar brezhoneg enoret en e skrivagnerien

Dre ur skrid sinet gantañ an 21 a viz kerzu 1943, en deus an Ao. Loeiz Dupiech, prefed Pennar-Bed, roet e asant da zezo Kuzul parrez Ploare eus ar 5 a viz gwen-golo diwezañ o lavarout e vo roet an anv a straed Yann-Ber-Kalloc'h d'an hent a ya skoaz-ouzh-skoaz gant straed A-Brizeug, hag an anv a straed Jakez-Riou d'an hent a ya eus Bali Kerlien da straed Yann-Ber-Kalloc'h.

Betek n'eus ket pell 'zo e skrivemp amañ, eun-hag-eun, e oa arc'hant da c'hounit gant ar brezhoneg; setu ma rankomp embann ivez e tastumer enor gant yezh hon tadoù. A! graet ez eus bet hent abaoe an amzer ma veze mezekaet ar vugale baour, ha roet dezho ar « vuoc'h », pa vezent tapet o vrezhonekaat er skol. Prizioù a bemp mil lurioù d'ar re vev; anvioù ar re dremenet da ruiou ar c'herioù, sede ar c'haerañ digoll d'ar stourmerien kozh, setu peadra entanañ ar yaouankizoù a zeu war o lerc'h. Goude tennet eus spered an dud ar gredenn diot e oa ar brezhoneg ur yezh war goll, e roer dezhañ hiviziken e frankizenn dindan heol benniget an Aotrou Doue. N'eo ket mui Yann-Gouer hepken

pe ar « paour kaezh martolod », a zeu brezhoneg ganto; kanañ a ra hor yezh ivez, ha muioc'h-



Yann-Ber KALLOC'H (1888-1917)


muiañ, war vuzeleoù ar vourc'hizien hag an aotronez desket. Bleuniañ a ra war diweuz an dimezelled mistr hag ar yaouankizoù sportel.

E-touez ar skrivagnerien nevez aet da anaon, ne c'helled ket dibab d'o reiñ da ruiou ur gêr, anvioù skedusoc'h eget re Jakez Riou ha Yann-Ber Kalloc'h. Rak mar deo berr o oberenn, dre ma 'z int marv re abred, prizioù eo hounnezh evel an aour, evel an diamant. Un had, ur vertuz a zo enni, a dalvezo d'ar Vrezhoneg keit ha ma vo anezho war an douar. Lore'h a c'hellint magañ war o sujed, rak bugale int da Vreizh, penn kil ha troad, ha betek mel o eskern, koulz Kalloc'h, paotr ar Mor, ha Jakez Riou, paotr an Argoad.

Yann Ber Kalloc'h, mab d'ur martolod, ha lesanvet « Bleimor », a voe ganet e Groe ar 24 a viz gouere 1888; mervel a reas ofiser er Brezel Bras, lazhet e-tal Urvilliers an 10 a viz ebrel 1917. Ne oa eta nemet 29 vloaz. — un oad ma n'o devez an darn vrasañ eus ar skrivagnerien vreizhat graet netra, koulz lavarout. — Kalloc'h vras, eñ, a chome war e lerc'h un dornad barzhonegoù, a voe embannet, goude ar brezel, dindan an anv a *Ar en deulin — War an daoulin*. — Flouroc'h, hesonoc'h mouezh eget hini barzh Enez Groe n'oa ket bet klevet abaoe ur viken e brezhoneg. Ganet e Lotei, e-kichen Kastellin, d'an 1-añ a viz mae 1899, tre-

men a rae Jakez Riou, e Kastell-Brien, lec'h e oa aet da glask ar pare d'e skevent, ar 14 a viz genver 1937. Eñ ivez eta e-kreiz e vrud. Menegomp, e-touez e oberoù, strobard kontadennoù *Geotenn ar Werc'hez* hag e bezh-c'hoari sabatuus, farsus ha fromus *Nomenoe!*

Moarvat, ma sellont ouzhimp diouzh laez Baradoz ar Sent Kozh a Vreizh, e tleont bezañ sebezet un disteraig, o welout o anvioù war blakennoù glas korn ur ru. Rak mar deus barzhed, n'o deus soñjet biskoazh e vijent bet enoret en doare-se, an daou-se int, a-drasur. Evit Jakez Riou, on sur en dije c'hoarzh gwalc'h e galon, rak paotr drant e oa, lemm dir e spered, ha douget dreist da fentigelliñ diwar-benn ar breud, an enorioù, ha menno an amezég. Ha forzh penaos, figus evel ma oa, re ziglok



Jakez RIOU (1899-1937)

e kave e oberoù, evit soñjal e gopr ebet...

Evel-se emañ kont, koulskoude. Hag amañ eo e rankomp saludiñ gant trugarez an Ao. Fransez Halna du Fretay hag holl Guzulierien parrez Ploare, du-hont a-zioc'h porzh Douarnenez, en anv ar brezhoneg hag ar vrezhonegerien, evit ar skouer vat emaint o nevez-reiñ d'o c'henvroiz.

En ur enoriñ daou skrivagner brezhonek, ar brezhoneg an hini o deus enoret ivez. Heuliet e vint, hep ket a var. Y. D.

Penaos e vez graet ur biniou

An danvez prenn

Bremañ adarre ez eo niverus ar baotred yaouank o klask bezañ sonerien. Diaes eo kavout benvegoù, avat, evel pep tra all. Setu ma klasker gouzout penaos ober biniou pe vombard. Mont a ra tud da c'houlenn gant ar c'halvez, ar c'harrer pe ar goveller zoken ober dezho ur benveg, evel ma raed kalz gwechall.

Da bep hini a vicher

An neb en deus desket ur vicher a oar mat ne c'hell ket ne vern piv ober n'eus forzh petra, nemet ul labour boutin bennak e vefe. Ne c'heller ket bezañ micherour hep bezañ desket mat al labour gant micherourien all, ampartiz ha skiant prenet dezho. M'eo bet ken dilezet hor benvegoù-seniñ e-pad an tregont vloaz diwezhañ, ez eus da abeg kentañ niver bras ar benvegoù graet fall, hep reizh na reolen, dezho a bep seurt toniadurioù hag a-wechoù hini ebet.

Ar gwellañ prenn eo ar patisandr ha koad du Mozambik ha Makasar. Er vro ne gaver nemet an hiltiber hag a vefe mat. Beuz Turkia a zo mat ivez, hini Breizh avat n'eo ket, daoust ma kaver kalz benvegoù graet gant beuz ar vro, hogen hogos holl e teuont da wariañ.

Ar wezenn a rank bezañ sec'h-mat kent bezañ heskennet. Graet ar plenk, eo da o lezel da sec'hañ c'hoazh. Goude e vez graet tammoù hervez braster ar pezhioù da durgnañ. An tammoù-se a vez graet un toull bihan en o c'hreiz ha laketaet tri bloaz all da sec'hañ, d'an nebeutañ. Ur wezenn ne c'hello talvezoù d'ober benvegoù sonerezh nemet c'hwec'h vloaz bennak goude bezañ bet diskaret. Ma n'eo ket ar prenn sec'h-mat, e teu peurliesañ da faoutañ pe da wariañ goude seniñ un nebeut mizioù. Ne c'heller

(Kendalc'h p. 2)

AR GWINIZH-DU gant AR C'HOUER KOZH

Hiziv e komzin ouzhoc'h diwar-benn ar gwinizh-du, a zo talvoudek drezañ e-unan, ha dre ma 'z eo mat da lakaat e stuz an douaroù skañv.

Diaes eo kaout had mat; kemmesket eo bet an had gwinizh-du en hor bro gant seurtoù fall, o deus graet ar muiañ droug; gounidigezh ar gwinizh-du a ya war ziskar; talvoudek bras eo koulskoude evit ul lodenn vras eus douaroù Breizh.

Gwellañ seurt gwinizh-du, an hini arc'hantek eo; anvet e vez evelse abalamour ma 'z eo luger-nus; tev ha krenn a-walc'h eo ar greun. Bez' e kaver kalz anezhañ e Bro-Wened. Mat eo ivez an hini anvet Prusian bihan, mat e vled, met bihanoc'h ar greun, ne zare-vont ket holl asambles ha dre-se ez int diaesoc'h da eostañ ha da zastum mat. Met ar brasañ droug a zeu eus ar gwinizh-du Tartari, anvet ivez Siberi, pe a-gustum, Kornig. Degaset eo bet ar seurt-mañ da Vreizh war zigarez ober boued chatal glas gant an delioù. Ha bremañ ez eus kement anezhañ, mesket gant an hini mat, ma 'z eus kalz a boan d'e gas kuit. Greun bihan ha begek eo, ha blaz c'hwerv a zo gant ar bleud o tont diouzh ar c'hornig-se. A-wechoù ez eus lo-

dennoù a vez gwerzhet evel gwinizh-du gwirion; hag enno an bant-e gornig hag ouzhpenn. Ret e vefe a-raok pep tra, dre an dibab dre vras, kas kuit ar c'hornig.

Seurtoù estren a zo ivez, a c'hellfed marteze gounit, da welout ha mat e vefent da zegas ha da c'hounit dre vras e Breizh: da skouer, gwinizh-du ar C'hanada, greun tev, liv louet evel ar re all, met gant roudennoù du war c'horre, tanav o c'hroc'h, ha dre se e roont nebeut a vrenn ha muioc'h a vled. En diwezh, gwinizh-du Bro-Ukren, tev evel ar piz bihan, sklaeroc'h o liv, ha mat o bleud. Evit gwir, studi ar seurtoù gwinizh-du a zo chomet war-lerc'h, ha kalz a chom da ober evit o anavezout mat hag evit gwellaat ar c'hounidigezh.

N'eo ket pep implij koulskoude ar gwinizh-du: evit ar yer ez eo ur boued a zoare hag ouzhpenn ezhommoù ar gêr, e vez gwerzhet bep bloaz ul lodenn vras, da gas en-dro da Baris pe da Lyon hag ivez d'ar Vande, evit an dud a sav yer; ha Breizh a zo bro ar gwinizh-du dreist ar re all. Ouzhpenn-se, ur boued mat eo d'an dud: krampouezh du giz Kernev, ha giz Breizh-Uhel — galetez a reer eus ar re-mañ — a zo, evel pep seurt bleud eñ, magusoc'h eget ar bouedoù diazot a reer re alies ganto, hiziv an deiz, ha yac'husoc'h eget kalz bouedoù kempennet en a-raok. Bez' ez eus, etre kroc'hien teñval ar greun, ha bleud an diabarzh, ur c'hroc'hienig tanav ennañ un danvez eoul, a ra lartoc'h ar gram-pouezhenn; krampouezh giz Breizh-Uhel o deus muioc'h eus an danvez-se; e giz Kemper, e vez malet e doare da gas kuit muioc'h a vrenn, ne viret ket kement eus an danvez-se, mes, diouzh un tu all, e lakaer muioc'h a amanenn.

(Kendalc'h p. 2.)

Ar Brezhoneg o c'hounit tachenn

Ar Brezhoneg el liseoù

Betek bremañ ne oa damzigoret d'ar brezhoneg nemet dorioù ar skolioù izel.

Kemmet eo an traoù abaoe an deizioù-mañ. Gant aotre an Aotrou Ministr e vo desket hor yezh d'ar vistri ha d'ar mestrezed-skol da zont, a zo e skol e liseoù « La Tour-d'Auvergne » hag « Aogust-Brizeug » e Kemper.

Ar miz diwezhañ hon eus gwelet ar brezhoneg degemeret er serifikad.

Hiziv e welomp ar brezhoneg o vountañ war dorioù al liseoù.

A-raok fin ar bloaz e vo degemeret, moarvat, en arnodennoù uhelañ.

Ar Brezhoneg en Testeni-a-studi

Lenn a reomp war « Bulletin Départemental des Instituts » Aodoù an Hanter-Noz ar c'heloù eurus-mañ diwar-benn ar brezhoneg e skolioù ar gouarnamant:

DEZO AN 1-añ A VIZ KERZU 1943

KEVRENN 1-añ: Sevel a raer un arnodenn diredi war ar brezhoneg en Testeni a studioù kentañ en departamantoù amañ da heul: Enez-ha-Gwilun; Aodoù an Hanter-Noz; Penn-ar-Bed; Loar-Izelañ; Mor-Bihan.

EIL GEVRENN: Ne vo dalc'het kont evit bezañ degemeret nemet eus ar poentoù a vo en tu-hont da well-wazh.

A. BONNARD.

Setu ul lezenn a-berzh Ministr an Deskadurezh, hag a vo deut mat da galz a vistriskol. Ne c'hortoze at re-mañ nemet ur broudig evel hennezh evit kregiñ kalonek da vrezhonekaat gant ar vugale. Hiviziken, e c'hellint mont dezhi dinec'h ha laouen.

Dalc'homp peg l Pep a dammig, ez ay ar marc'h gant ar big.

Selaouit 'ta!

© Meneget eo bet amañ, ar sizhun dremenet, seizhvet deiz-ha-bloaz, d'ar 14 a viz genver, marv ar skrivagner Jakez Riou, e Kastell-Brien.

© Ne dalvez ket nemeur miz ar yenjenn d'hor brezhonegerien, rak mont a ra da Anaon, d'ar mare-se, meur a hini anezho.

© Da skouer, mar deo tremenet d'an 30 a viz kerzu 1896, ar montroulezaed Olier Souetr, tad ar werzh brudet-holl « Ar Roue Gralon ha Kêr-lz », d'ar 5 a viz genver 1909 eo e varve, e Brest, Per Pronost, ganet e Trelez e 1861, hag aozer al levr « Annaig, Roz Gouez ha Lili »; d'ar 6 a viz genver 1885, e varve ivez ar c'horonal Troude, eus Brest, saver geriadurioù gallek-brezhonek; d'ar 6 atav, er bloavezh 1938, e varve en e gêr c'hinidik, an Ao. Emil Ernod, ganet e Sant-Brieg e miz gouere 1852. Gouziakañ den a voe biskoazh war ar brezhoneg e voe Emil Ernod. Talvoudus-bras eo atav e c'heriadurioù hag e studiadennoù war ar yezh. Evel skrivagner, en deus embannet « Gwerzioù Barz ar Gouet » ha, nebeut a-raok e varv, ur strobard « Mojennoù ».

© E miz genver 1933, erfin, e voe kavet marv war vord an hent, e Pleuvian, ar barzh kaer ha reuzidik Erwan Berthou, tad al levr barzhonegoù dispar « Dre an delenn hag ar c'horn-boud », ha kement a skridoù all.

EMGANN KERIDU, gant Alan Inizan, a zo goulennet da brenañ. Skriv. da Wilh. Berthou, 72, str. Oberthür, Roazhon.

ENSAVADUR BREIZH KI HA KAZH

Un enklask a zigoromp evit gouzout peseurt anvioù a vez roet d'ar c'hizhier ha d'ar chas e Breizh-Izel.

Kas ar respontoù da :
Sekretourva
« ENSAVADUR BREIZH »
72, straed Oberthür, ROAZHON.

NEDELEG e Skol Blistin

Berv a zo bet e Skol Blistin e-touez ar vugale. Edo ar re-mañ da vat o labourat da aozañ a-zoare un devezh gouel, devezh ar Wezenn Nedeleg. Plezet o deus garlantezioù, treset o deus rolloù, peurzsket o deus ar pezh o devoe da zibunañ dirak o c'herent hag an dud all pedet, un toulladig anezho hepken, siwazh, dre ziouser a blas.

D'ar merc'her 22 a viz Kerzu, goude kreisteiz e voe an abadenig-se. Goude-se e voe roet traoù ar Wezenn Nedeleg. Forzh pegen difonn e voe, plijadur ha deus graet dezho, bezit asur!

An ehanou-skol a grogas goude an deiz-gouel-se, hag e padint betek ar sadorn, 8 a viz Genver 1944, ma listroio ar vugale d'ar skol. Ne vez ket graet nemeur a drouz a-zivout Skol Blistin. Bale a ra eun atav avat, dre douez diaestrioù spontus, kriz a-wechoù. Ret eo soñjal en amzer ma vevomp enni, en dilez a bep sikour a-berzh-stad a c'houzañvomp. Ha c'hoazh ne vo ket meizet mat ar boan a vez o terc'hel un oberenn badus evel houmañ war-sav.

Roit eta, kenbroiz, da gef ar skol e galanna!

KERLANN.

KASIT
KELEIER HA KONTADENNOU
DA « ARVOR »

AR FURCHER BREZHONEK

Yann QUERE

(1825 - 1898)

E « Feiz ha Breiz », gwengolo 1938, emañ displeget gant Yann ar Go (Y. Ar Goff d'ar mare-se), an traou retañ hoc'h eus da c'houzout diwar-benn Yann ar C'here. Dre ma veze skrivet e anv Quéré, gantañ e-unan ha gant ar c'hazetennoù hag al levrioù a gomz dioutañ, e skrivan-me ivez « Quéré ».

Penaos ober enklask diwar e benn abendall ? Daoust ivez hag e veze anvet Yann ar C'here pe Yann Gere ? Gouzout a ran e vez lavaret Per ar C'here ha Fañch ar C'here; Yann, avat, a vez gwakaet lizherenn gantañ an anv-tiegezh war e lerc'h.

Ganet e voe Yann e Plouézan e 1825, beleet e 1850, kure eo e Brieg e 1850, e Plouider e 1855 e S. Loeiz Brest e 1856; anvet eo da berson Moezan e 1865, da berson Kastellin e 1874. Mervel a reas eo d'ar 24 a viz gwengolo 1898.

A-raok bezañ lakaet da ober levr ganto, e voe moulet Kanaouennoù Kerne (1900) war ar C'hourrier (4-2-1899, hag all). Pa sellot ouzh al levr e welot ez eo ar c'hentskriz skrivet en doare kozh, C emañ; n'eo ket an hevelep hini gant ar rimadelloù hag ar mojennoù.

Ur werz, « Kastelfidardo » hoc'h anv, a voe abeg ma voe anvet an Ao. Quéré « Barzh Kastelfidardo ».

Hervez Taldir, en e levr diwar-benn Prosper Proux, an Ao. Jezegou, hag a lakaas moulañ oberoù an Ao. Quéré, a voe brokus en e geñver dre lakaat en o zouez « Alanik al Louarn » hag « Ar Pennoe'h » — a vije bet aozet gant Proux. An dornskridoù anezho a zo etre daouarn Taldir ha diwar dorn Proux, eme Jaffrennou. Daoust da se e lavaran-me « a vije bet », rak n'en deus ket soñjet Taldir (P. Proux, paj. 173) ez eo « Ar Pennoe'h » war don « Maout ar Go ha Maout ar Gall », mibien an Ao. Quéré. Ha setu m'en dije Proux kemeret ton Quéré, ha Quéré komzoù Proux. Dezho da vezañ kitez en eil e-keñver egile o deus roet an hevelep anv d'ur vojenn : « Tadic koz ar Brabancer ».

Meuleudi ar « C'haouennoù » a gaver e « Bull. Soc. Archéol. Finistère », XXVII, p. LIX, 1900.

E diwezh al levr, anv aozer ebet gantañ, ez eo diskleriet : « pour paraître prochainement Grammadek an Aotrou Quere, Sermoniou Aotrou Quéré ».

Gedal a reomp abaoe e varv e ve kavet e C'hramadeg.

Konferansou an Ao. Quere a zo bet roet da dañva da lennerien « Feiz ha Breiz » (1904 h. a.) a-raok o berniañ e daou levr (Brest, Kaigre, 1907).

Pa voe kurunennet I.-V. ar Folgoad (7-8 gwengolo 1888) e savas an Ao. Quere « Kantik nevez Itron-Varia-Folgoat graet gant an Ao. Quere, person ar C'hastellin » (16 e. 8 v. 76 p. + diskan). Moulet e oa war ul levrig anvet « Fêtes du Couronnement, programme. Impr. de l'Océan, 19, rue Kléber, Brest », ha war follennoù dis-

tag (« Imprimatur » 16 cost 1888 ; moulet e Kemper e ti Kerangal). L. LOK.

Ar gwinizh-du

(Kendale'h ar baj. 1)

Arabat ankounac'haaf ivez, n'eus par d'ar gwinizh-du da ober farz ar c'hig ha farz. Bez' ez eus kalz milinoù bihan, o labourat gant mein milin hag o valañ evit ar chatal, a val ar gwinizh-du ivez : pe gant kerc'h hag heiz war un dro, pe a-du. Bez' ez eus ivez milinoù giz nevez o labourat gant ruilhennou houarn, a val ar gwinizh-du ha netra ken : bez' ez eus da vihanañ unan e-kichen Roazhon, hag unan e Kemper, ha re all marteze.

E kant kilo greun ez eus : tri-ugent kilo bleud mat pevar c'hilo lostennachoù bleud ur c'hilo ha tregont brenn, a vez kaset d'ar varc'hadourion a gempenn boued melaset d'al loened (marc'hadourion Naoened, Versailles, Reims ha tro Evreux)

erfin, pemp dre gant a loustoni, poultrenn, h. a...

Kontet e vez e c'heller, o c'hounit mat, costañ daou vil lur gwinizh-du dre zvezh-arat. Hogen meur a wech, abalamour d'an had pe d'ar c'hounidigezh, ne zastumer ket an hanter, da lavarout eo mil lur.

En ur ger, un droug e vefe lezel gounidigezh ar gwinizh-du da vont war ziskar. Vad a ra d'an douar e kement lec'h ez eo skañv ha difonn, e douar gwaremnoù kozh; hag ar c'hiz fall hon eus kemeret e Breizh da dennañ, dre nerzh al ludu chimik hag ar raz, eus douaroù pinvidikaet a bell 'zo gant al lann, met skañv ha paour e gwirionez, costoù re greñv evito. E-lec'h dastum leve an douar, pennfollet ma 'z omp gant ar ouiziegezh nevez, e krignomp ar c'hospital war-eeun.

Vad a ra ar gwinizh-du d'an dud ha d'al loened ivez, o kinnig deomp ur boued azotet un tamm, evel pep seurt bleud. Hogen, evit kenderc'hel gantañ e vefe ret gwellaat an hadoù dre an dibab dre vras da gantañ, ha mont war-raok gant ar studioù a ouiziegezh e-keñver ar seurtoù-dibab hag ar bleud, evit gwellaat ar c'hounidigezh hag ar marc'had.

PET LOEN A ZO WAR AN DOUAR ?

N'eus ket pell hont eus lennet war ur gazetenn eus bro-Danmark ar pennad war niver al loened a bep seurt a vije war an douar.

N'eus ken, hervezi, nemet ur c'haat frikorneg (rinoseros) bennak, kazi holl el liorzhoù-loened, ha daou c'haat gorilh (ur seurt marmouz bras). Bez' e vije 100.000 olifant, ha 150.000 tigr ! Evit ar c'hañvalad, un dorgenn pe div dorgenn dezho war o c'hein, e vijent tost da 5 milion.

Met... pelec'h eo net da gavout an diskleriadurioù-se ?

BREZEL AR POST

Kouezhet eo niver ar goloù en un doare spontus e miz Kerzu : 189 hepken (e-lec'h 229 e miz Du).

Koulskoude e vez kaset ur bern lizheroù er miz-se, da gefiver Nedeleg ha Kalanna. Brezhonegerion ! hastit afo da gas hoc'h hetoù d'ho mignoned, ha SKRIVIT AR CHOM-LEC'HIOU E BREZHONEG.

Taolenn a enor : S. B. B. Gwengamp 38 Dl. Ar Rouz 11 S. B. B. Pluniav 10

Anvioù brezhonek d'hor straedoù !

Ul lenner a skriv dimp :

« Kouz eo lakaat fin da Vreizh ar Post. Hag evit-se ez eus un tu dispar, a gav din : Goulenn digant pennoù-kêrioù Breizh lakaat anv pep straed, ball, leur-gêr, kae, h. a. E BREZHONEG, pe en ur lemel ar piakoù all, pe en ur lakaat piakoù brezhonek a-us d'ar piakoù gallek.

'Vel-se ne vefe ken a zigarez da nac'hañ al lizheroù skrivet gant an anvioù-se, a vo anvioù eeun ha « stadek ». Petra 'gav deoc'h-c'hwie eus va meno ? »

AN AMZER O TREMEN

Biskoazh gwashoc'h, war a lavarer eus an daou da biskoazh taeroc'h n'eo bet an emgannoù war dalbenn divent an U. R. S. S. Daou vilion a Rused eus un tu, 700.000 Europad (Alamaned, Roumaniz, h. a.) eus un tu all, ne gemeront ehan ebet. Tapet eo bet gêr Kirovograd gant an Armeour. Krogadou a zo e Retchitsa, e Berdichev, e Vitebsk, e tro genioù ar Pripet, en ur ger berr, penn-da-benn al linenn. Kilañ a ra an Alamaned tamm ha tamm, en ur ober distruj bras e-touez o enebourien.

E-keñver brezel an U. R. S. S. n'eo hini an Itali nemet ur c'hoari-bugale. Atav emañ ar Saozon-Amerikaned endro da Venafro, Cassino ha Mignano. Kavout a reont d'en em zigarezñ, ez eus erc'h hag amzer fall.

Kendale'h a ra kirri-nij meur ar Saozon-Amerikaned da vombazañ kêrioù en Alamagn (Berlin, Mannheim, Ludwigshafen, Kiel, h. a.) e Bro-C'hall (departamantoù ar Charentes, ar Gironda, ar Seine-Inférieure, ar Manche, h. a.) en Itali (Roma, Torino, Pistoia). N'eo ket hep damant evit ar c'hirri-nij, avat. Taolet eo bet dezho d'an traoù 231 nijerez-veur, ken nemet e-pad seizh-vezh kentañ ar bloaz 1944.

War vor, ez embann an Alamaned o deus kaset d'ar sond, e-doug miz kerzu diwezhañ, 225.000 toennad a vagoù-marc'hadourezh ha 25 lestr-brezel saoz-amerikat. Abaoe o deus distrujet 21 destroyer all.

Eus o zu, e ra Japaniz da c'houzout o deus gouledet 14 bag-splujer d'an Amerikaned, abaoe miz here.

An Amerikaned, avat, o deus distrujet soudarded en euz bras Breizh Nevez. Bec'h o deus ganto Japaniz.

ALIQU AR MEDISIN DIWAD-FRI

An diwadoù-fri ne dint ket grevus peurliesañ : dont a reont dre ma 'z eo bet torret gwazhedigoù 'zo, lec'hiet war ar speurenn o tistrannañ ar fri e div fronell. Aon a reont, koulskoude, d'an hini a zo e wad o tiverañ kerkoulz ha d'ar re oc'h ober war e dro. Talvoudus eo evel-se gouzout petra 'zo mat da ober ha petra 'zo fall.

Arabat eo, evel ma vez graet

alies, lakaat un alc'houez war ar c'hein, — dour yen-skorn war-dro ar gouzoug, war ar bruched pe war ar c'hof-bihan. Arabat ivez lakaat e-barzh ar fri an dour-louzoù melen-du, « Perklorur-houarn » e anv, a vez kavet alies en armel-louzoù ar vamm-gozh. Ma 'z eus anezhañ, lezil-eñ da gousket dindan ar poultre hag ar gwitadon kevrid !

Petra a reol 'ta ? Da gantañ holl, astennit an hini klañv, en e led e benn ken izel hag e ziuskoaz. Neuze, klaskit dre be fronell emañ ar gwad o tiverañ, rak peurliesañ e teu dre ur fronell nemelken. Pouezet start, e-pad ur pemp munutenn bennak, gant ho piz-jod, war ar fronell o liwadañ. Mar deo bihan an diwad, e vo echu gantañ pa vo tennet ho piz.

Ma n'eo ket a-walc'h, ma liver c'hoazh, eo. ret lakaat e-barzh ar fronell ur stouf, e kotoñs-stoub pe, gwelloc'h, e lien-gaz, glebiet gant « dour oksijenel » pe gant dour ez eus bet teuzet ennañ ul louzoù anvet « antipirin ». Lezil ar stouf er fronell eus c'hwec'h da zaou zek eur. Sonnet eo neuze ar gwad, ha krazet al lienenn. Ret eo glebiañ anezhi adarre gant dour oksijenel evit hen dibegañ.

A-wechoù e strilh ar gwad fonus. Ret eo gervel ar medisin diouzhtu : an hini klañv a zo un den deut war an oad hag an diwad-fri a zo neuze arouez ur c'hleñved a-bouez : droug-kalon, droug-avu, droug ar gwazhied-kas deuet da vezañ kalek. Ne hetan ket deoc'h unan eus ar gwad-draoù-se !

D' R.

ROAZHON-BREIZH

(288 m. 6)

LUN 17 GENVER 1944

Breizh al Labour-Douar 19 e. — Bleiz-piz an harikoz (G.), gant Esnault. 19 e. 8. — Diwar-benn an dibab (B.), gant Ar C'houer Kozh.

MEURZH 18 GENVER

Evit Breizh-Uhel (G.) 18 e. 30. — Redadegoù-bagoù Kanaven, c'hoari-skingsomz gant Julieta Nizan; gant Strollad Rannyezherien Roazhon-Breizh.

18 e. 50. — Afoestoù Breizh : Stup-Heol, gant Yann Marchand. C'hoariet gant al laz-seniñ, blienet gant Moris Henderick.

19 e. 5. — An Aotrou 'n Eskop Duchêne, kaozeadenn da geñver e gant-veit dezha-bloaz, gant Florian Le Roy.

MERC'HER 19 GENVER

Breizh ar Mor 19 e. — Merdeadurezh-kenwerzh Breizh (G.), gant R. Dyèvre.

19 e. 8. — E Douarnenez, pesketarez ar Vugale (B.), gant Herle Blo-mare'h.

YAOU 20 GENVER

Kardeur ar Framm Keltiek Aozet gant Kevrenn an Istor 19 e. — Daoust ha ne ve ket bet ar Vretoned ar re gantañ o vont en tu all d'ar mor Atlantik ? (G.), gant G.-G. Toudouze.

19 e. 8. — Eus Aruorig da Vreizh : ur gudenn istorel (B.), gant Per Lao-rañs.

GWENER 21 GENVER

Ar Vuhez Keltiek 19 e. — Gwareziñ kanaouennoù, dañsoù ha marvailhoù pobl Iwerzhon (G.), gant Jord ar Mec.

19 e. 8. — Eñvoerennoù-Beaj e Bro-Gembre (B.), gant Fr. Vallée.

SADORN 22 GENVER

C'hoariva brezhonek (B.) 18 e. 30. — Marc'had kuzh, pezh-c'hoari gant Jakez Konan, displeget gant Strollad « Gwalarn ».

19 e. — Kentel vrezhonek Andrev Gellec.

19 e. 10. — Dre al levrioù hag ar c'helaouennoù, gant Youenn Drezen.

N'ankounac'hañ ket kef "BREZHONEG AR VUGALE"

(Kont-red-post Roazhon 121.10 war anv L. NEMO, 110, boulouard Metz, Roazhon.)

Nevez voulet GERIADUR BREZHONEK GALLEK ROPARZ HEMON

BOUDIG AN AOD

gant Paol FEVAL

Aozet e brezhoneg gant Per DENEZ

Evitañ, dibaot a wech e kouske er gêr. se a ouzomp.

E penn kêriadenn ar Pevar-Foull-Holen e oa ur vercuri vras ; dirak ar vercuri, er verjez, ur berchennad vray a blouz, seizh gwech brasoc'h eget lochenn mamm Yannig.

Amañ e oa gwir lojeiz ar c'hokesaer bihan. Er plouz en doa kleuzet un toull klok hag eno e kouske gwelloc'h egedoc'h hag egedon.

A-hend-all, ur c'havr he doa e vamm hag a gemere e blas er gêr. Ret-mat e oa dezhañ kavout bod e lec'h all.

Bez' e skleure dija goulaouig an deiz en tu all da Venez Dol ha da grec'hiennoù Sant-Melear ar Mor pa erruas Yannig dirak e vern plouz. Re

abred e oa da vont da skeiñ ouzh dor Simon Ar Priol. Tamolodiñ a reas en e doull hag en em reiñ da gousket.

Ar gouskadenn vat a reas ! hag an huñvreoù kaer !

Gwelout a reas pileoù enaouet evit e eured en iliz bourc'h Sant-Jorj. Fanchon a gase he merc'h d'an aoter ha Simon Ar Priol en doa gwisket e borpan-gouel.

Pa gouske Yannig ur wech, evit mat e oa. Sevel a reas an heol ha mont da guzh a-raok d'ar paotrig dihuniñ. Pa zigoras e zaoulagad, e oa dija kouezhet an noz.

« — O ! da ! », emezañ, « pell emañ an deiz o tarzhañ hiziv ! »

Hag en da vont er-maez eus e vern kolo, o c'hortoz atav an heol.

Al loar eo a savas.

« — Alo ! » eme Yannig outañ e-unan, « ur vray a gouskadenn am eus graet. Ret din redek buan da di Simon Ar Priol da c'houlenn Simonaig da zimeziñ ! »

Laouen e redas hent. Edo e yalc'h gantañ dindan e groc'henn dañvad. Skeiñ a reas ouzh dor Simon.

« — Hola ! paotrig », eme ar merour kozh dezhañ pa voe deut tre, « abaoe peur e skoez ouzh an dorioù evel pa vefes un dra bennak ? »

Evit gwir, ne veze ket Yannig kustum da skeiñ ouzh an dorioù. Bez' e rae evel ar c'hizhier : dont tre an didrouzañ m'helle.

M'en doa skoet fenozh, e oa dre ma sante, hep gouzout dezhañ zoken, e oa deut da vezañ un dra bennak.

« — Demat deoc'h, Simon Ar Priol », emezañ, ar ruz o sevel d'e zivjod, « demat deoc'h, Itron Fanchon, ha d'an tiad a-bezh. »

An tiad a oa anezhañ div vuoc'h ha tri femoc'h. Er-maez edo Simonaig, ar pevar Matilin hag ar peder Goton.

Sellout a reas Fanchon ha Simon an eil ouzh egile.

« — Petra en deus 'ta, ar paotrig-se ? » a c'houlennas ar wreg. « Anat war e zremm ez eo pennfollet-holl. »

« — Ha klañv out, paotrig ? » a droc'has Simon gant madelezh.

Ne ouie ket Yannig hag e oa klañv pe yac'h. Sonnet-holl e oa e deod. Bez' e kave dezhañ neuze e oa Simon Ar Priol

KELEIER EUS AR VRO

BRO-LEON

GWIPAVAZ

GOUELIOU NEDELEG. — Setu eta ar pempvet gouel Nedeleg abaoe m'eo krog ar brezel. Glac'harus eo bet evel ar re lidet er bloavezhioù tremenet. Pegen laouen ha pegen d'edius e oa ar gouelioù Nedeleg a-raok ar brezel, gant ar Pelligent, ken anavezet war hor maezioù. Gwelet e veze an dud o vont niverus da selaou ofereñ hanternoz, ma klevet neuze kement a ganaouennoù hag a sonerezh. Hiziv, siwazh, m'eus nemet tristidigezh.

E Gwipavaz, evit gouel Nedeleg ne voe ket graet a didoù bras. En ofereñn-bred e voe graet ar brezegenn, e galleg, siwazh, gant ar Ao. Roue, kelennet e Lesneven, breur d'an Ao. Roue, kare er barrez.

Diouzh an abardaez e voe displeget ur pezh-c'hoari diwar-benn Nedeleg. Ar pezh-c'hoari-mañ, a oa bet displeget en dere'hent, a voe c'hoariet adarre da sul kentañ ar bloaz 1944. Displeget e voe en un doare ampart-meurbet gant paotred yaouank ar voure'h, remet gant an Ao. Marsel Goux. Siwazh, ne voe nemet galleg er pezh-c'hoari. Perak dilezel evel-se hor Brezhoneg ? Ur barrez vrezhonek eo c'hoazh koulskoude Gwipavaz. Perak e tro kement hor yaouankizoù ouz ar galleg, n'eo evidomp-ni Breizhiz, nemet ur yezh e vroad ? Perak e vez dilezet hor yezh gwirion, yezh hon tadoù, hor Brezhoneg ?

Peur e vo gwelet adarre e Gwipavaz, evel daouzek pe bemek vloaz ? zo, pezhioù-c'hoari brezhonek, displeget fraez en un doare ampart dirak ar barrezianiz ?

Y. AR CHOUAN.

LANDEDA

UR SKOUER A VEDEDE. — Disul 2 a c'henvet en deus displeget, en Ao. Person, dirak e barrezianiz, niver ar badeziantoù, ar marvioù hag an dimezioù degouezhet er barrez e-doug ar bloavezh 1943. Ma ! ur freal e oa, hervez ar pastor kozh, kenveriañ niver ar marvioù gant hini ar gani-digezhioù.

27 den a zo bet interet er barrez, en o zouez 3 pe 4 estrañjour.

20 eured a zo bet lidet. 48 bugel a zo bet badezet : kazi div wech muioc'h eta a vadeziantoù eget a interamantoù. Na pebezh skouer gaer en ur barrez a 2.200 den, tra m'emañ koulskoude ar familhoù skobt ha disranet gant ar brezel.

Fiziañs a zeu er c'halonoù breton pa seller ouz ur seurt taolenn. E-pad m'emañ ar gwallzarvoudoù oc'h ober o reuz er bed, o lazhañ hag o vuturniañ, e vleugn ar vuhez war maezioù Breizh.

Ar Vretoned a ziskouez dre-se ez int atav eus gouen kadarn ha kreñ ar Gelted, bepred yaec'h ha bev-buhezek.

Breizhiz a sell ouz ar vugale evel ar vrasañ pinvidigezh : ha kement-se a zo gwir. Ne dalv netra da ur vro kaout douaroù ha pinvidigezhioù-natur e-leizh, ma ne deus ket a dud d'o gounit. Gwelomp en-dro deomp broioù war o diskar, aet to'e hor diwar diboblañ. Ar maezioù, er broioù reuzidik-se ; a zo o tidudañ dalc'hmata. Ha mantrasat gwel eo, tiez, ha keriadennoù a-bezh zoken, dilezet ha goulo. Evidomp-ni Breizhiz, e c'hellomp kaout feiz en amzer-da-zont hor bro rak daoust d'ar brezelioù kriz (a chom atav kalz eus hor c'henvroiz enno) emañ ar boblañs war gresk aba pell zo.

Ne lavaran ket eo purreizh ar Vretoned, ar pezh na zegouezh ket war ar douar-trubuilhus-mañ, ul levenez

(Kendalc'h ar baj. 2)

hag e wreg uheloc'h tud eget ur roue hag ur rouanez.

Ergentaouik, dereat-meurbet e seblante dezhañ lavarout en ur zont tre :

« — Demat deoc'h, c'hwi-holl, bez' e teuan da zimeziñ gant Simonaig. »

Bremañ, n'helle mui.

« — Va gwreg », eme Simon, « dislivet-holl eo, krenañ a ra gant an derzhienn. Ro dezhañ ur skudellad vat a sistr da dommañ dezhañ e galon. »

« — O ! trugarez deoc'h », a hiboudas Yannig, « n'eo ket yen d'am c'halon, en enep. Plijadur avat a raio din ar skudellad sistr. Ez an' da lavarout deoc'h ; ret deoc'h-c'hwi ho-taou gouzout an dra-se ; chañs am eus bet... »

Gwigourat a reas an nor war he muduronoù. War an treuzoù en em ziskouezas javedoù mestr Visant Gefez.

Gwazh a se, siwazh, rak Yannig a oa o vont da zibunañ e chapeled en un taol.

Sachañ a reas Visant Gefez war ar guchennad vlev dispak dirak e dal. Evel-se eo e salute.

Goude ec'h azezas war ur skabell e korn an

oaled.

Abaoe ar mintin edo mestr Visant Gefez o klask gouzout penaos kas ar c'hokesaer bihan d'ar groug. Chom a rae Yannig balc'h e c'henou.

« — Ma ! » eme Fanchon, « petore eurvad a zo degouezhet gavit, va faotrig ? »

En em lakaat a reas Yannig da dortisañ blev e groc'hen dañvad.

Remerkañ a reas Gefez e oa nec'het ar c'hoke-saer bihan ouz e welout amañ. Ur blijadur dreist a reas an dra-se dezhañ.

« — Alo ! komz buan ! » a grias Simon. « Hag e kav dit hon eus amzer d'intent ouzhit un abardaevez a-bezh ? »

« — O ! nann sur-mat ! mestr Simon, a respontas Yannig uvel-meurbet, daoust na ve ket deut, hepdoc'h, ar soñj-se dia, anat eo se. »

« — Peseurt soñj ? »

« — Soñj an hanter-kant skoed Naoned... »

« — Hag e vennfes gwerzhañ penn hon Aotrou mat ! » a grias Fanchon, ruz dija gant an droug.

Digeriñ a reas mestr Gefez e zivskouarn.

« — Nann, m'hen tou », eme Yannig, « Rener ar soudarded her c'hinnigas din dija, met... na 'z aio da glask un treitour e lec'h all ! »

UR VICHER ISKIS

An dastumerien vioù merion

Anavezout a reer nebeut a draoù war un darn eus ar micherioù bihan, da gentañ penn e-touez re an douar. Labour ar verionerien da skouer. Dastumerien vioù merion eo ar verionerien. Ur vicher souezhus, a vrag un niver mat a dud e rannvroioù 'zo hag a roe tro, kalz a-raok ar brezel, d'ur verzhidigezh a-bouez bras. Ar verionerien ne fougasont ket o mi-

cher. Dre izelded hep mar, dre aon rak ar gevezerien ivez.

Setu amañ petra eo micher ar merioner. Er rannvroioù gouezaj, darempredet a-ratozh evit an hemole'h, e vez dastumadeg ar vioù merion penn-abeg ur c'henwerzh talvoudus. Pezh a vez anvet vioù merion gant an dud a vicher eo preñvedennoù hag a vez serret e-barzh ur c'hlos gweet gant ar breñvedenn hi-hec'h-unan kent he zreuzfurmatur. An dra-se n'he deus netra da welout gant ar vioù end-eeun, evel just. Implijet e vez ar preñvedennoù-se evit magañ ar c'hilheien gouez yaouank. « Viù merion » a vez roet d'ar re-mañ da zebriñ. Ar vioù-se a vez lakat e seier lien kaset gant an dastumerion, ha gwerzhet dre litrad. Debrñ a ra ur c'hilhog gouez yaouank war-dro un eizhvedenn litrad viù merion bemdez, hag an debrer c'hoantek-se a fell dezhañ ur magadur reizh. Labour ar verionerien eo.

Da darzh an deiz, ez a ar merioner war ar maez da glask ar merioneoù. Ar re-mañ a zo anavezet gantañ. O merket en deus en a-raok evit e zastumadeg. Ne zale nemet ar verionerien nemet evit eost pezh a anvout merion du. Div ouenn verion a vez klasket dreist-holl ganto : *Formica pratensis* De Geer ha *Formica rufa* Linné.

Ar merioner ne glask ket kalz ar gouennoù all, ha pellaat a ra gant evezh diouzh ar merioù ruz, rak doujañ a ra o flemmadennoù. Da vare an amzer domm eo e vez dastumet ar viù merion. Padout a ra an dastumadeg eus miz Mezheven da zibenn miz Eost.

A-boan ma tarzh an deiz pa en em sank ar merioner er c'hoadoù. An abeg eo ez eo freskoc'h diouzh ar beure, hag ar merion ne vezont ket ken bliv ha ken prim ivez ; n'int ket fall, hag an aezennoù a sav diouzh ar verionez n'int ket ken noazus.

Kavout a reer merioneoù dindan goad, dindan ar raden, ar brug pe a-wel zoken. Toullou int, en douar pe er gwirioù gwez marv warno un durumell graet dan-vezennnoù gwez, briñsennoù, bru-zuñachoù plant strollet e bernioù, dezho, eus 50 da 60 santimetr uhelder d'ar muiañ. Ar merioneoù bras gwelet tro-dro Rambouillet a dal ral eo. ouzhpenn 1 metr. E rannvroioù 'zo, en « Haute-Saône » da skouer, e vez kavet merioneoù uheloc'h eget un den.

(Da gendec'hel.)

Evit ar vugale

LEVR AN AMPREVANED

gant G. B. KERVERZIOU

SKRIDOU BREIZH, 35, straed Traverse, BREST.

BRO-DREGER

LANUON

KANV. — Gant tristezh hon eus klevet keloù marv Mari-Wengia, mer-c'hig vihan hor mignon bras, an Ao. Doktor Lamidon. Interet eo bet an aelig d'ar 6 a viz genver. Kinnig a reomp d'he c'herent glac'haret hor c'halonekañ goure'hemennoù a gengañv.

PLISTIN

NEDELEG E « SKOL BLISTIN ». — Gouel Nedeleg a zo bet lidet gant kalz a don e Skol Vrezhonek Blistin d'ar m'erc'her 22 a viz kerzu goude kreisteiz. Dirak kerent ar vugale ha mignonned d'ar skol, e voe c'hoariet ur pezhig-c'hoari, e voe kanet e brezhoneg, displeget e brezhoneg war ul lez c'hoari bet savet er sal-skol e tal ar wezenn kinklet-holl, gant bugale ha na ouient ket a vrezhoneg tri miz 'zo. Adkregiñ a ray ar skol war-lerc'h ehanoù Nedeleg-deiz kentañ ar bloaz d'al lun 10 a viz Genver.

LAERON E TI-KER PLISTIN. — Laeron armet o deus taget an ti-kêr ha kaset ganto, pa ne oa den c'hoazh er barevioù, an holl dikedoù-boued evit miz genver. Se a zo c'hoarvezet d'al lun 27 a viz kerzu. An darvoud-se a zo deuet da vezañ boutin-tre bremañ er parrezioù. Evel hoaz ne vezo ket tapet al laeron.

NEDELEG AR VUGALE. — Bugale skolioù Plistin, re ar barrez, a oa bet pedet holl da zont d'ar gouel graet evit e Sal ar Gouelioù ar gumun. Lodenet e voe etrezo, daoust d'an amzerioù diaes a vevomp enno bremañ, c'hoarielloù ha madigoù.

BREIZH-UHEL

DINAN

GOUDE KENDALC'H AR « FRAMM KELTIK »

D'an 11 ha d'an 12 a viz kerzu e voe e Dinna kendalc'h ar Framm Keltiek. Setu amañ penaos e voe an traoù :

D'an 11 diouzh ar beure, en em vodas izili « Kenoreuriez ar Micherioù-Ar hag an Hengounioù-pobl », dindan renadur an Ao. Quimbrot. Graet e voe ur brezegenn gant an Ao. Jorj Rual, ha savet ur strollad lec'hel eus ar Grenvreuriez-se.

Da c'houde e voe leinet a-gevret, Florian Le Roy e laez an daol.

Neuz ez eas ar gendalc'herion da welout labouradegoù. Da 16 e 30, e voe ur ouel sonerezh er flivskudenndi « Celti », gant an Ao. Jef Penven, an It. Montier-Hermer ha Vacher, an Dim. Beon. Klevet e voe oberoù eus Gwion Roparzh, Jef Penven, Rhené-Baton, Haudebert. En diwez e voe sonet « Kan-bale Roparzh Bruce » gant ar violoñs, ar gourred, ar piano hag ar binioù bras. Pa 'z eas ar gendalc'herion er-maez e oa ere'h.

Kregiñ a reas an eil devezh gant bodadeg « Kerann-studi Breizh-Uhel » a voe graet enni war-dro rannyezhoù Breizh-Uhel hag ivez war-dro ar brezhoneg.

Lein a voe da 12 e 30, dindan renadur an Ao. Dezarrois, evezhier ar Mirdioù ; d'an dibenn, e kanas hag e korollas yaouankizoù Keltiek Keltiek Dinan. D'an abardaez e voe ar « Vodadeg Veur » en Ti-kêr, renet gant an

DAITIGE DU FOURNET.

BRO-NAONED

LEVRAOUEG « ENSAVADUR BREIZH » EN NAONED. — Gouzout a oar lennerion *Arvor* e oa bet savet, daou vloaz hanter 'zo, ul levraoueg vrezhonek, e Naoned, e ti ar gazetenn *La Bretagne*, kae « de la Fosse ». Ne oa ket aes a-walc'h al lec'h-se hag, e-pad an hañvezh diwezhañ, e reas ar reterion o menoz lakaat al levraoueg e-lec'h all. Un taol mat e voe dezho, peogwir eo bet drastet kriz li ar gazetenn gant ar bombezadegoù e miz gwengolo. Miret a-grenn eo bet evel-se al levrioù ha lakaet e stal hor mignon Gab ar Moal, levrier war blasenn an Ti-Eskemm, e-lec'h ma c'hello ar vrezhonegerion amprestañ unan beannañ anezho, pa garint. Digoret e vez ar stal d'ar m'erc'her, d'ar m'erc'her, d'ar yaou ha d'ar sadorn.

KANV. — Marv eo, er miz diwezhañ, e brud e oad, hor mignon ker an Doktor Ewan ar Bod, e parrez vihan « Grandchamp des Fontaines », e-lec'h ma oa deutaus Breizh-Izel, e vro c'henidik, da ober e vicher. Ne oa ket mat-kenañ yec'hed an Doktor ar Bod, ha n'en deus ket gallet derc'hel pell ouz skuzhderioù ar medisinerzh war ar maez, deut da vezañ poaniosoù-h-poanisoù gant an diaesterioù a-vremañ. Ur Breizhad a zoare a oa anezhañ, o labourat start atav evit Breizh hag ar Brezhoneg. Ra dearvezo e bried hag e vugaloù degemer hor gwellañ goure'hemennoù a gengañv !

« — Mat-tre ! »

« — Skoedoù all eo », a gendalc'has Yannig, « skoedoù hag a zo... skoedoù hag am eus... erfin, e lavarin deoc'h... skoedoù int, na petra 'ta ! »

Sevel a reas e benn, eürus gant un diskleriadur ker sklaer.

« — Se ne lavar ket dimp... » a grogas mestr Visant Gefez.

N'hel lezas ket Yannig da echuiñ.

« — Evit pezh a sell ouzhoc'h, paotr », emezañ rust, « ne gomzer ket ouzoc'h ! Ma vennit toullañ kaoz ganin, kit d'am gortoz a-dreñv an nor. »

Adarre e sellas Simon hag e wreg an eil ouz egile.

Ar Yannig kaezh-se, ken aonik hag ar yer ! Klask a reas mestr Gefez mouse'hoarzhin, met un orbid divalav-meurbet eo a gammas e veg.

A-nevez e troas Yannig davet ar merour hag e wreg.

« — C'hwi 'wel », emezañ, « ne garan ket re an Norman-se dre ma vez atav o kantreal tro-dro da Simonaig. »

« — Ha petra 'ra se dit, paotrig ? » a farsas Simon.

(Da gendec'hel.)

NEVENOE, DEN A VREZEL KROUER UR STAD

gant Pol AR FLOC'H

Daoust hag ez eo bet Nevenoe an den brasañ eus Istor Breizh ? Marteze. Hep faziñ avat, hor brezelour brasañ. Ha koulskoude, n'eus den, e-touez ar Vrezhoned veur, hag a zo nebeutoc'h anavezet derou e vuhez. Un tiern e oa moarvat, marteze eus kostez Plou-lann-Veur, e Reter Bro-Wened, ha nann ur c'houer paour en dije dizollet un teñzor, evl ma lavare e enebourion.

N'ouzomp ket zoken pegoulz na penaos e teuas da ren war e gen-vroiz a-berzh an impalaer Loiez, mab Karl-Veur. Goude unan eus emsaviou ar Vrezhoned e tlee bezañ, war-dro 830; anvet e voe, moarvat e kêr Ingelheim, e Germania, da gannad an Impalaer e Breizh, « missus dominicus in Britannia ».

Evel kargad ar Franked eo enta e krogas da vleniañ ar vro; kont Gwened, anezhi ur gêr frank war harzoù Breizh, ha gouarnour ar Vrezhoned e oa war un dro. Keit ha ma vevas Loiez e chomas Nevenoe feal dezhañ, daoust d'an Impalaer gouzavñ a bep seurt trubuilhoù ha brezelioù digant e vibion; herzel a reas ouzh ar Vrezhoned d'en em sevel enep ar Franked, o soñjal moarvat ne oa ket deut c'hoazh ar c'houlz.

Met goustadik e teue e levezon war ar vro da greskiñ; krouidigezh abati Konwoion e Redon, aotreet gantañ en anv an Impalaer, e-pad ma oa hemañ prizoniad e vibion, a greñvaas galloud ar Vrezhoned war harzoù bet dalc'het gwechall gant ar Franked.

D'an 20 a Vezheven 840 e varvas mab Karl-Veur. Impalaerezh vras ar Franked a voe rannet neuze etre e vibion, ha Charlez ar Moal a zegemeras lodenn ar C'hornog gant Breizh enni. Goude ur pennad amzer en em savas Nevenoe enep dezhañ, ha gwestañ a reas Bro-Roazhon ha Bro-Naoned; ne felle ken dezhañ anv gwazoniezh d'ar roue frank, na kennebeut d'e vreur hag enebour Lothar. En em unaniñ a reas gant ur Frank eus an Naoned, ar c'hont Lamberzh; e miz Mae 843 e voe trec'h soudarded Lamberzh hag Erispoe, mab Nomenoe, war re an duged frank. Daoust dezhañ bezañ degemeret gourc'hemennou an tri roue frank, bodet e Thionville, e kendalc'has Nevenoe da argadiñ bro ar C'hallaoued, war-du Angers ha Poitiers. Charlez ar Moal a gerzhas neuze a-enep dezhañ, met trec'het ha lakaet da dec'hout e voe gant ar Vrezhoned e gwernerier Ballon, e parrez Baen-war-an-Oud, d'an 8 a viz Mezheven 845. Unan eus devezhioù brasañ hon istor.

Da heul arsaillhadegoù nevez ar Vrezhoned, a gerzhas e 846 betek Bayeux, en ur wastañ bepred ar vro, ha da heul gourc'hemennou nevez ar roueed hag an Iliz frank a-enep dezhañ, en em daolas an tiern e 849 war bro ar C'hallaoued. Roazhon a voe kemeret ha disman-tret gantañ, ha soudarded kêr prizoniet ha kaset da Vreizh-Izel. Naoned ivez a gouezhas adarre etre daouarn ar Vrezhoned. Da c'houde ez argasas Nomenoe, a-gevret gant Lamberzh, broioù an

Anjou hag ar Maine E-touez ar Franked prizoniet ganto, n'eus nemet an ofiserion a voe kaset en harlu; dizarmet ha kaset d'ar gêr e voe ar re all. E-pad ar brelel-se e kerzhas Nevenoe, evel ma avar hon istorour kozh Per Ar Baod, betek Vendôme, en ur freuzañ hag en ur danañ ar c'harterioù « eus al Liger betek Neustria ». Edo e arme oc'h ober he reuz e-kreiz Bro-Velez, war-nes mont da Char-trez, pa varvas ar priñs en un taol, d'ar 7 a viz Meurzh 851. Gant ul levezon vras e klevas ar Franked keloù marv o enebour pennañ: lavarout a rejod zoken e oa an dar-voud-se « kastiz a-berzh Doue » a-enep « gwallgasour ar veleion »; lazhet e oa bet, war a lavared, gant kleze un ael.

Disheñvel-mik e voe evel-just barnadenn ar Vrezhoned diwar-benn o den meur; douaret e voe gant enor ha doujañs en abati Redon. Daoust d'e vrud a grizder en deus Nevenoe trec'het ur wech ouzhpenn war e enebourion, war dachenn an envor, a-drugarez da vrogarouriezh istorourion ha skrivagnerion vrezhon eus amzer ar manterolez. N'en deus ket koulskoude, siwazh, ar vrud a dlefe kaout e spered ar Vrezhoned a-vremañ ! Gantañ e voe staget Gwened, Roazhon ha Naoned ouzh Breizh, — asantiñ a reas Charlez ar Moal d'ar greskidigezh-se, er bloaz war-lerc'h marv Nomenoe, dre an emglev sinet en Angers etre-zañ hag Erispoe. Gantañ e voe krouet enta Bro-Vreizh evel m'eo bet en amzer ar Rouantelezh, an dugelezh ha betek bremañ. Gantañ ivez e voe krouet skeudenn gantañ ur Stad e Breizh; unanet en deus dindan ur renerezh hepken ar Vrezhoned, o doa araozañ ur bern tierned ha priñsed wihan, ar pezh a lakae an traoù d'ar Franked.

Aes rak, daoust dezhañ bezañ bet dreist-holl un den a vrezel, en deus graet ivez un oberenn a bouez war dachenn ar mererezh-bro. E c'hall-loud a zeue moarvat da gentañ eus e garg a-berzh an Impalaer, met dre ma oa ur Brezhon o ren war e vro-erñ, kalz brasoc'h e voe ar galloud-se eget hini ur c'hargad kaset gant ar Palez d'ur vro estren, evel boaz, dreist-holl pa voe dieu-bet diouzh aotrouniezh ar Franked. War skouer ar re-se, o doa kalz da zeskiñ d'ar Vrezhoned, eo e renas e vro, nemet evel just a-enep dezho.

Evel an Impalaerion e fellas dezhañ bezañ mestri war Iliz ar Vro. An eskibion frank a Vreizh, pe mignon d'ar Franked, a voe barnet e bodadeg Koetlev, war zigarez bezañ gwerzhet ar sakramantoù, ha kaset er-maez eus o c'hado-riou. Tud ar vro a gemeras o lec'h. Ne oa ket gwall-reizh an dra-se, hep arvar, ha respont a reas ar Pab hag Iliz Bro-C'hall da glem-mou an eskibion en ur sevel o mouezh enep Rener ar Vrezhoned. Ne reas forzh. Trec'h e oa Neve-noe, hag ober a reas ar politike-rezh a blije dezhañ. E bal a oa

moarvat, gant skoazell en abad Konwoion, dieubiñ Iliz Vreizh diouzh yev arc'heskob Tours, hag he lakaat war-eeun dindan Roma. Kaset da vat e voe evit ur mare ar menez-se gantañ, hag adkroget gant Salaun.

Gwirioù Iliz Vreizh a zifenne gant nerzh ha kalon, dreist-holl re abati Redon: ur c'hannad, Dre-wallon, a voe evel-se anvet evit kas da vat ur prosez etre Konwoion hag e eneber Fetmer. Ha n'eo ket hepken evit beleion ha menez-h en doa da varn, met ivez evit ar re all hag evitañ e-unan. Peurliesañ e tlee an hini en doa graet un torfed paeañ arc'hant, evel m'edo ar boaz e-touez ar C'hermaned pe ar Gelled; un den, Demhoiarn e anv, en doa lazhet Kadored, gwaz Neve-noe, a voe barnet da reiñ digoll d'ar priñs. Ret e oa d'al lezvarn bezañ reizh: daou vreur, o doa klasket gounit ur prosez en ur ginnig ur c'harrad gwin da Neve-noe, a voe kondaonet, ha barnet ouzhpenn da reiñ ar gwin dezhañ...

Evel-se, dindan ur rener a oa war un dro ur brezelour taer hag ur merour ampart, e voe krouet Stad Vreizh. Lavaret eo bet zoken en doa kemeret Nevenoe an anv a roue; kurunennet e vije bet en Iliz-Veur Dol. Koulskoude, n'eus meneg ebet, e dielloù an amzer, eus an dra-se, ijinet en XI^{vet} gant ur beleg eus Naoned, enebour d'ar Vrezhoned. Bepred e vez anvet Nevenoe « dug », « priñs » pe « Nomenoe ar Breizhad ». Ur wech hepken e lavar ur skrivagner frank « ar roue Nevenoe », dre fazi moarvat. D'am meno, n'eo bet kurunennet morse hor roue kentañ; ur gwir roue koulskoude, a rae fae avat war anvioù ha gizioù estren. Gwell e oa dezhañ kaout ur galloud gwirion eget ar skeud anezhañ. Goude e varv e resevo Erispoe an anv en doa gounezet Krouer Breizh.

FENTIGELLOU

Digabius
— Ar wech kentañ deoc'h reiñ ur bouch d'ho kwreg, arabat en em lakaat er-prenestr e-giz-se, evel dec'h da noz.
— Petra 'maoc'h o komtañ din aze? N'on ket bet tamm ebet er gêr dec'h da noz!

Fall an traoù
— Ne chomin ket ar munud ouzhpenn ganeoc'h; mont a ran en-dro da di va mamm.
— Re zivvezhat; tabut a zo bet etre ho tad hag ho mamm hag houmañ a zo o paouez distreiñ da di ho mamm-gozh.

Ar mezvler
— Un dra bennak hoc'h eus kollet?
— Ya, va all'houez.
— Amañ hoc'h eus kollet anezhañ!
— Nann, un tammig pelloc'h du-se.
— Met perak e klaskit amañ neuze?
— Peogwir eo kalz sklaeroc'h amañ.

UL LUR GIG KRISTEN, MAR PLIJ !... AN DEBRIÑ-TUD

3) A-wechoù all, en Afrika dreist-holl, e vez an debriñ ur c'hastiz euzhus lakaet da dorjetoution 'zo (avoultreion pe skraperion-verc'hed dreist-holl) a vez barnet da vezañ « debret ez vev ». An hini kablus a vez staget ouzh ur peul pe ur wezenn, e-kichen un tantad bras, ha goude lidoù relijiel e krog an abadenn. An den en deus da glemm (ar pried da skouer mar deo ur plac'h kondaonet evit avoultreizeh) a dosta da gentañ hag a droc'h war gorf ar reuzeudig an tamm a blij dezhañ ar gwellañ, hag en em denn da rostañ ha da zebriñ e damm, tra ma tosta ar re all pep hini d'e dro, da ober kemend-all. Rostet ha debret e vez pep tamm war an taol, ha ne vez ket evet a evajoù kreñv, rak kompren a rit, ul lid relijiel hag ur c'hastiz eo war un dro, ha nann ur pred-fest. Echu an abadenn e vez erfin troc'het e benn d'an hini a zo bet talvezet dezhañ e dorjed, a c'hellit kredañ.

Broioù an debriñ-tud

Ha bremañ, pelec'h e vez kavet debreion-dud hiziv an deiz? Merzet hoc'h eus moarvat ez eus bet meneg meur a wech eus Afrika hag Okeania; ar broioù-se eo a zo kreñvlec'hioù diwezhañ an debriñ-tud.

E kreiz Afrika e vez anavezet gant kalz pobloù, hogen ez a war gill bepred abalamour d'ar brezel didruz: a vez graet dezhañ gant Europiz, ha, zoken, gant ar roueed vorian gounezet d'ar gristeniezh pe an islam (unan eus ar re zivwezhañ-se a lavare d'e sujidi e oant « bezioù bev »). Lec'h ma 'z eus tud wenn e vez difennet groñs ganto an debriñ-tud, ha kastizet evel un torfed, en doare ne vez graet nemet dre guzh, pe e-kreiz ar c'hoadoù pell diouzh kreizenn ar re wenn. Hanter-kant vloaz 'zo avat e oa kalz boutinoc'h, hag evel ma lavaren uheloc'h, sevenetoc'h e veze peurliesañ an debreion eget ar re zebret, speredekoc'h, ampartoc'h ha laeroc'h. Dahomeiz da skouer, a rōas kement a zarbar d'ar C'hallaoued gant o roue Behanzin hag o « amazonezed » (brezelouezed), hag a oa debreion-dud touet (gwelout en Nuoned adarre, e Mir-di an Naturouriezh ar wech-mañ, klopennoù-tud bet kemeret e palez Behanzin, kaeraet gant plakou koveur kizellet: gwir vrayigoù...). Ar beajour brudet Stanley a gont pebez hiris a dremenas war e gein pa glevas, en ur ziskenn an Oubangi, mouezhioù diwelus o ka-

nañ a bep tu d'ar stêr an diskan braouac'hus-mañ: « Setu kig, kig o tremen, setu kig, setu kig... » Ar mouezhioù-se a oa re poblad ar v-Bondjoed, tud vliizidik a wellae o... fennou-chatal ouzh o lakaat da drempañ en dour e-pad meur a zez goude terrif dezho o izili: tene-roc'h a se e teuent, d'o meno. Beajourion goshoc'h a gont doareoù eus gwir « kigerdiou-den » ma 'z ae tud ar vro da brenañ o c'hig evit pred an deiz; hogen « dibaot ar wirionez ha stank ar gevler » evel ma lavaren.

En Amerika e oa gwechall ar Garaibed pe Gantibled debreion-dud eus ar gwashañ, evel m'hen diskouez ar ger « cannibale » tremenet e meur a yezh hag a zeu eus o anv. Kig-sall a raent gant o enebourion lazhet pe brizoniet. Aet int da get, koulz lavaret; hogen n'eo ket sur ne vije ket c'hoazh a zebre-riou-dud e-touez pobloù damzianav koadoù bras Amerika an Traoñ. Da vhanañ eo prizel-tre ganto ar « pennaoua » da lavarout eo an dastum pennoù troc'het ha kem-pennet (bihanaet a-wechoù betek ment un aval-orahjez, dre droioù a-ratozh), hogen un dra all eo.

En Okeania ez eus ivez enezennoù peuzdianav ma tebrer c'hoar-h nesañ e pep onestiz, dreist-holl e Borneo, e Guinea-Nevez ha en Inizi Salaun, lec'h m'emañ bremañ Japaniz hag Amerikaned oc'h en em dagañ, unan eus spontusañ ha kevrinusañ broioù an douar.

En Azia n'eo mui anavezet an debriñ-tud, nemet marteze gant an Negritoed, da lavarout eo an dud vihan-tre, du ha peourouz, a zo annezidit goshañ Azia ar Gevred. Darn anezho da vhanañ a ra gwa-degennoù gant gwad o enebourion; aze 'z eus evel just menoz distruj nerzh ar re-se hag he lakaat da dal-vezout evito o-unan.

Hag en Europa? Nann, evel just, n'eus ket a zebreion-dud, ar pezh na sinifi ket e vije gwelloc'h Euro-piz eget ar re all. Hogen n'eus ket bet kont atav evel-se, hervez doare. Ar Biktet, a veve gwechall-gozh e Bro-Skos, a dremene da zebreion-dud, ha betek an XVIII^{vet} kantved ez eus bet e Bro-Skos a vare da vare tud tamallet dezho an hevelep tor-fed, ha neket atav e gaou marteze. (Un dra kalz bravoc'h: un den en deus brevet en Aljeria en deus touet din e tremene ar Vretoned da zebreion-vugale e-touez tud ar vrose!) Ouzhpenn-se, e-touez meur a bobl e kaved gwechall-gozh boazioù a c'hell bezañ roudoù eus an debriñ-tud: da skouer an evañ e klopennoù an enebourion gant ar Gelled hag ar C'hermaned.

Un dra a zo enta da denañ diouzh kement-se: n'eo ket an debriñ tud, pegen erezus bennak e seblant dimp, efed ar onezoni pe an ezhom, na zoken peurliesañ al lipouserezh. Un doare lid relijiel eo evit lennañ nerzh an enebour, diskouez doujañs ouzh ar re varv pe kastizañ torfedoù 'zo. Ha gant-se e pado pell amzer c'hoazh, daoust m'emañ o kilañ bemdez dirak ar sevenadurezh.

ARZEL EVEN.

AR CHOUANEREZH e bro Kastell-Brien

Ur sell war stad ar maezioù

Ar wech diwezhañ, hon eus gweladennet a-gevret bro an Naoned dre vras.

Hiziv, e tesrevellin da lennerien Arvor an istor marzhus, hini ar Chouanerezh, e bro Kastell-Brien; ur bajenn vray ha fromus eus hon istor...

A rumm da rumm, e veve sioul ha didrabas kouerien bro ar Meeun. Pinvidik ne oant ket, a-dra-sur; d'an ampoent avat, n'oa ket an dud ken figus hag hiziv; bevañ a raent gant nebeut. P'en doa lonket ur skudellad laezh ribol gant putatez (ne veze ket debret kalz a vara, er mare-se), a-wechoù, un asiedad kistin, hag ouzhpenn-se, ur volennad jistr dous da lakaat da ziskenn, e oa kontant Yann Gouer, debret e walc'h gantañ. Dianav pe beuz-dianav e oa ar c'hig, nemet ar c'hig sall, war ar maezioù, gwechall, hag, evit

lavarout gwir, n'eus ket keit-se ma 'z a ar gouerien da di ar c'higer. Hiziv an deiz zoken, ez eus tud diwar ar maez e-leizh oc'h en em vogañ dres evel a-raok an Dis-pac'h.

Mes, e lavarot marteze, evned-porzho o doa da zebriñ... Ya ! evel-just... Dibaot a-walc'h avat, e oa ar goueriadedez a vefe bet barrek da aozañ ur penn-yeer e doare. Debriñ a raent yer marteze, hogen nebeut, a-dra-sur. Hiziv eo cheñchet an traoù, un tammig; en em vogañ a ra an dud diwar ar maez gwelloc'h eget en amzer gwechall, hogen ur pemzek pe ugent bloaz 'zo bennak (...ha bremañ zoken), e kave gwelloc'h da goueriadedez a oa gwerzhañ o evned-porzho er marc'hallac'h evit un dornadig gwenneien, ha prenañ gant an arc'hant-se un harink mogedet pe un dousenn sardin.

An atantoù a oa enno muioc'h a fuajoù eget a zouaroù gounezet. Divent ar c'hoadoù hag al lanneier. Kreskiñ a rae al lann hag ar balan, ur blijadur; betek tri pe bevar metr uhelder e tapent. Ne c'hou-neze ar gouerien nemet ar pezh a oa ret evit bevañ an tiegezh, hag, ouzhpenn-se, gwerzhañ a raent er foar ul loen pe zaou evit paeañ o Gouel-Mikael.

Ne rae ket berzh ar c'henwerzh evel bremañ. Rouesoc'h e oa ar foarioù bras, ha niver al loened kaset eno bihanoc'h eget hiziv. Meur a c'hounideg-douar a oa merour anezhañ, tieg war zaouhanter, da lavarout eo en doa, da C'houel-Mikael ha d'an Deiz Kentañ a viz Mae, da zaouhanterin ar gounid hag ar c'hollou gant Aotrou ar C'hastell pe ar Maner, o mestr, ha c'hoariet e oa ar jeu evit ur bloavezhad adarre. N'oa ket an No-blañsoù enebourien evit ar gouerien. Rok, a-wechoù, darn anezho; ret anzav, koulskoude, n'oant ket dre vras ken rust e-keñver an dud izel ha m'eo bet desket dimp e skolioù ar gouarnamant. Ma vijent bet ken drouk-se, n'eo ket i e vije aet an dud vunut da glask da renerien. Ren a rae ar peoc'h...

Avel an Dispac'h o sevel...

Abaoe ur bloavezh bennak, e rede a vereuri da vereuri, a gastell da vaner, a vourc'h da vourc'h, brudoù spontus. Traoù euzhus, bis-koazh gwelet na klevet, a c'hoar-veze e Paris. Betek neuze, n'en em chale ket re ar vaezidig gant traoù ha tud Paris. Paris dianav, Paris... en tu all d'ar Bed !... Gwellet e voe, o redek dre ar maezioù diouzh ar serr-noz, kan-farted iskis, dreist-natur, o klask toullañ kaoz gant ar gristenien, taer o imor ouzhpenn-se, ha prest atav da glask tabut. Biskoazh kement-all !... Gwellet e voe en oabl tresoù ha sinadoù, evel ma vez kent pep brezel, kent pep dispac'h... Seblantoù ne oant ken, o kemenn da Vab-Den ar mallozhioù ruz, na vankfent ket da gouezhañ war hor paour kaezh rann-vro.

Daoust d'ar c'heñver ken fall ha ken fall, ne vele ket c'hoazh poblañs an toled an danjer o tedos-taot... ken an deiz ma tiskennas e Kastell-Brien Aotronez kran, a zegas ganto ar C'hatekiz nevez. Ar veleien ne fellas ket dezho touiñ o feiz da « Lezenn-diazez

sivil ar C'hoer », — Constitution Civile du Clergé. — Ret e voe dezho skoachañ e-kreiz ar c'hoadoù, e-lec'h ma voent enket evel loened divalav. Galvet e voe dindan banniel ar Republik holl baotred yaouank ar vro, da vezañ kaset goude war an harzoù, gant an Enor da zifenn ar « Frankiz », ar « Vro » ouzh ar « Vac'homerien » (an Diranted !)... Gerioù kleuz, gerioù dister, gerioù hep dason e kalonoù hor c'houerien. Pescart Frankiz ?... Ar Republik an hini a laere diganto o zammig Frankiz !

Fustet e voe ar flc'hier en un doare digustum.

« — Ne vo ket gwall-gaer da venveg evit falc'hat, paotr ! »

« — Evit falc'hat an ed-du ?... Hum !... ne gav ket din; evit troc'hañ pennoù ar Re-C'hlas, ne lavaran ket. »

Fanch AL LANNOU.

(Da genderc'hel.)

Ar Merour: GW. BERTHOU

Ti-Moulevrezh KREIZ ROAZHON

Aotre P. C. 520